



**Priz : Daou Wennek**

**Eur bloaz koumanant : C'houec'h real.  
Gant « AR BOBL » en tu-all : Ugent real.**



## Paëroniez "AR VRO"

---

An Aotrou 'N Eskop DUBOURG. — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON. — An Aotrou Kannad LAMY. — An Aotrou Kannad HEMON. — An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ. — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, "AB GWILLERM" — An Itron Enorus MOSHER. — An Itron Enorus ANNA A GERVENOÆL. — An Dimezelled Enorus NATHALI ha MAC'HARIT DE VOLZ-QUERHOËNT.

---

## Hanoiou Skrivanierien "AR VRO"

---

**Iez Gwened.** — Blei Lannvau. — Bleimor. — Kelen Glaz. — Efflam Koet-Skau. — Job en Drouz-Vor. — Loeiz Herrieu (Barh labourer). — Pengleuik.

**Iez K. L. T.** — Jos Albaret. — An Arc'hantek. — Armel. — Ar Berr (Abalor). — Bruk. — Ar Bruger. — Charlez Ar Braz. — Barz ar Blawez. — (ar Yeodet) Bocher. — Biler (Azenor). — Berthou (Alc'houeder). — Barzik Kerglaz. — Ar C'hozik. — Ar C'horfek. — Ar C'harget. — Ieunik ar C'hastellnevez. — Louisa Charan. — An Du. — Doph an Ti-all. — Evnik Arvor. — Esnault. — Even. — Ian Ar Fustek. — Ar Furcher. — Ar Garrek. — Ar Goffik. — Ar Gall. — Loeiz Gourlet. — Ar Gak. — Godest. — Gwennou. — H. Gwillerm. — Gouriou. — Glazardik ar Bod-dero. — Leon Ar Gourenner. — Eflam An Henoret. — Jaffrennou (Taldir). — Kerniliz. — Lunedek. — Laouik. — Meriadek. — Ar May. — L. Ar Menn. — Meliaf. — Ian Naden. — Pennhouarn. — Ch. Picquenard (Barz Melen). — Loiz Ar Roz. — Loiz Porzikel. — Potr Ar C'hap. — Klaoda Ar Prat. — Per Pronost (Barz Treflez). — J. Ar Pelleter. — Iouen Poullan. — Renan Ar Rouz. — Jord Ar Rumeur (Mathaliz). — Ian Roudot (Mel-oc'h-dir). — Anna-Mari Ropars. — Erwan Sebillot. — Ar Sevellek. — Tiercelin. — Iannik Ar Venaër. — F. Vallée (Ab Hervé).

---



# AR VRO

Penn-Rener : FANCH JAFERENNOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »

(Sant KADO)

---

---

## K R E N N A D

*Dalc'homp d'ar brezonek reiz, PAOTR AR C'HAP. — Eur C'had kontammet, IEUNIK AR C'HASTELLNEVEZ. — Penoz e teuaz eur C'had da Gaz, IEUNIK AR C'HASTELLNEVEZ. — An Tri Breur, DOPH AN TI-ALL. — Skeuden ar Vuegez, AR YEODET-BOCHER. — An Alc'houeder, LOEIZ GOURLET. Kenavo, KENEC'H DU. — Ar Falc'herien, LOUIS AR PAGE. — Mont da Bariz, PENN DERO. — D'ar Menez Bre, MATHALIZ. — Kentoc'h mervel, MATHALIZ. — Dihunomp! MATHALIZ. — Peden ar Vreiziz, MATHALIZ. Ar Glanded, ROC'HLANN. — Efflam Kerzenan ha Mac'haridik, AN HENORET.*

---

---

## DALC'HOMP D'AR BREZONEK REIZ

---

En naontekved kantved a zo bet savet kalz werziou ha peurvuia gwerziou ha zoniou poblus gant barzed dianavezet. Deuz ar re-ze eoe fell d'in komz hirio.

Piou n'euz ket zonzj da veza klevet, var barlen e vamm, ha divezatoch er pardonioù hag er foarioù ar gwerziou ken brudet : Ar zerjant-major, ar zeiz skiant natural, chanson ar peder vestrez, ar gwall deodou, chanson Kupidon, Kimiad an ozac'h, Tristidigez ar vro en 1870 ha kalz re-all (eul leor ve renket kaout evid ho niveri holl). Piou n'euz ket ho desket ha kanet anezo aliez ive ? Diduel ha plijadur hon zadou o deuz great epad meur a vloavez hag hon hini, a reont c'hoaz, kement-se a zo zur. Hon zadou, ar darn-vuia euz outo dreist-holl, ne oant ket 'vit kaout etre o daouarn gwerziou dudiuz Brizeuk, Kervarker, Ar Iann, Ar skour, Prosper Proux, an Uhel, etc... pere oant ket skignet dre ar vro, ha ne oant anveet nemed gant an dud gwiziek.

Red oa d'ezo eta 'n em gontanti gant ar feillennou 'vije gwerzet d'ezo 'vid daou pe dri gwennek er marc'hajou pe er pardonioù.

Mez mar neuz great vad ar gwerziou hag ar zoniou-ze d'hon zadou, en tu-all o deuz ive great kalz drouk d'ar brezonek, abalamour an darn-vuia outo oa leun a c'hiriou gallek.

Ha neubeud da neubeud, ar giriou gallek kutuillet 'barz er gwerziou-ze a gemeraz 'lec'h ar giriou brezonek mad hage vijent impliet gant ar bobl en e zivizou. Setu ar pez a zo kalz kirriek, mar klever en devez a hirio, var ar mez, e-kalz a lec'hiou, eur brezonek ken ma-c'hagnet ha ken kaillaret a c'hiriou gallek.

Dre vad, ar Varzed a hirio 'deuz kaset kuit al louzdoni-ze a zaotree hon brezonek ker !

Dalc'homp var an hent-se, va mignoned, dalc'homp hon brezonek dinam atao ha leuskomp a goste kement gir pehini n'eo ket a ouen geltiek.

Bevet bepred ar brezonek reiz !

PAOTR AR C'HAP.



## Eur C'had kontammet

Eur zulvez vintin, mintin vad, eur c'houeriad a zeue e kear gant eur baner goloet oc'h e vrec'h. An dra-ma a dremene nan en Bro-Saoz an taolman, mez en eur gearik koant euz Kerne, ha ne fell ket d'in hanvel, 'vit goloï eun tammik troiou va c'henvroiz. Aoun en doa mechanz ouz eun dra bennag rag elec'h dond gant ar ruiou braz, ez ê deuz an eil karont bihan d'egile. Digouezet e-korn an dachen foar, e chomaz eun tammik da zellet en dro d'ean 'n eur grabisat e benn, krog o zonzal 'n eun dra bennag hag a ree poan spered d'ean, kazimant sur. « Han, kement-se ! ne c'hellan ket mont d'an oferen gant ar baner-ma oc'h va brec'h emezan ; mar gasfen anean da di Mitellig 'zo aman e-kichen. » Kerkent sonjet, kerkent sevenet, ha setu hen en ti.

— De mad d'eoc'h Per, ha iac'h oc'h bepred ?

— Ia 'ta, ha c'houi 'giz a welan, ma mad ar bed ganeoc'h ive 'ta kender koz ?

— Mad tre, egiz e lavaret, a drugare Doue !

— Ha petra zo a neve ganeoc'h, pa oc'h ken abred e ker, ha d'am gwelet ?

— Setu aman ar stal, bea meuz ganin ama eur baner hag a garfenn lakat anean en eun tu bennag keit vin o vont d'an oferen

— Ia 'ta, laket anean aze war ar variken.

Hon den o veza et 'kuit, Mitellig a dosteaz euz ar baner 'vit c'houesad eun tammik ar pez a oa ebarz.

— Ho ! ho ! diga ! peseurt pikol tra ! emezan, gant hounez avad ne vet ket diez ober morlarjez dru, ha dreist-holl va hini-goz neuz ket kavet e far, 'vit aoza ar seurt anevaled. Bezomp fin, ha gwelomp mar vo c'helluz prena anean paz re ger. Dao e deski d'ar c'houeriaded-ze beva ha kaout truez ouz an dud paour n'eunt ket gedon da zebri bemdez.

Al louarn koz ne varc'hataz ket pell war an doare da zond a-benn euz e daol. Kemer a reaz eur blouzen, pe eur gorzen voan bennag, ha goude bea great eun toullik 'barz ar c'horen, en em lakaz da c'houea kement ha kement, mar teuaz ar c'had heuzuz da welet : neuze e ereaz an toull, hag e lakeaz an aneval en dro er baner evel araog.

Ne oa ket peurachuet an aviel diveza, gant aoun da veza tapet er zermon, hor Jakez a zeuaz er-meaz, mall warnean dond da glask e baner. Kaout a reaz anean 'lec'h oa lakeet. Mitellig, ar vouse'hoarz war e vuzellou, a dosteaz dioutan.

— Ac'hanta, oac'h en distro, meuz aoun ne ket bet pell an oferen hirio, ne gav ket d'in peuz daleet kalz er zermon !

— Nan, en gwirione, eun tammik prez zo warnon.

— Ho ! ha neuze, amzavit hardiz, c'houi zo eur c'hristen groz ive. Petre zo ganeoc'h n'ho paner aze 'ta ?

— Ar mintin-ma ez oun bet ober eun droiad hag e meuz tiet eur c'had kaer awalc'h, ha bremae e garfen kaout gwerz d'ei.

— Deusket ama !

Er memez amzer e oe digoret ar baner, ha Mitellig o sellet ebarz a leuskaz eun hopaden :

— Eur c'had ! ne ket c'helluz, pe neuze peuz great eun dra bennag d'ei ; ne ket zoken hanvel oc'h aneval ebed !

Ar c'houeriad a oa estlamet ha sabatuet o welet an dra-ze ne ouie ket petra azlavaret da rebechou Mitellig.

— Petra, a lavare heman, c'houi peuz ar fron da zond e kear gant eun aneval evel-se ! C'houi peuz kavet hounnez grevet 'n eun toull bennag euz ho parkeier, pe piou oar, marteze ho peuz kontammet anei oc'h eun, ha breman 'vit kaout eun neubeud gwenneien n'e peuz ket aoun da z!struj eun tiad tud ganthi ; evidon-me ne garfen ket bea n'ho ler, goude eun hevelep torfed.

— Ne meuz great netra sur d'ezhi, eme ar c'houeriad, pa meuz he dapet e oa beo c'hoaz.

— Ia, ia, klasket digareou, c'houi c'hallo lavaret an dra-ze d'an arche-rien pa goueffont war ho koug.

— Petra rin ganthi neuze ?



— O ! ar pez 'po c'hoant, evidon-me n'em gargan ket diouthi, gant aoun ve red d'in dougen an toaz d'ar forn evidoc'h, ar pez ne blichfe ket eur groz d'in.

— Mez, ha mar iafec'h da daol anei en teill 'n eun tu bennag ?

— 'Vit an dra-ze e c'hellin ober evidoc'h awalc'h, daoust mar 'z eo riskuz braz ober an disterra kammed er meaz euz an ti gant eur pez lor egiz-se.

— Mad, kemeret eur banne 'vit ho poan.

— O nan, me n'hini e ginnig d'eoc'h, pa eo gwir ho peuz bet an hevelep dizeur.

— Allo d'ho iec'hed !

— D'hoc'h hini !

— Asa... kement-se ! kement-se !

— Kemer eun all !

— Nan, bennoz, eur wech all bennag.

— Mad, kenavo, ne lavaret grik, ket 'ta.

— Nan nan, bezit zur ! Allo kenavo, ha gwella chanz !

Mar vize distroet ar paour kez den e benn, nize gwelet Mitellig o tenn e deod, hag o frota e gof gant ar blijadur da veza deut a-benn euz e daol evelse.

Ne ket red lavaret penoz n'en doa ket bet aoun goude da lipat e bao warlec'h ar c'had kontammet hag e bredaz ganthi epad eun neubeud deveziou.

IEUNIK AR C'HASTELLNEVEZ

---

## Penoz e teuaz eur c'had da gaz

---

Eur Saoz, mevel en ti eun Aotrou euz Hampstead, kerik tost da Londrez a oa kaset eun devez gant e vestr da gas eur c'had beo d'eur mignon d'ezan o chom en Londrez.

Laket e oa d'ezan en eur zac'h, ha va den en hent. Vardro diou leo bale en doa d'ober, hag eno, 'giz en Breiz, a oa meur a hostaliri penn-da-benn an hent. Hon Saoz, e c'hellit kredi, n'alle ket chom heb mont d'ober eur gwel d'unan nezo, red a oa ober eun diskuizha freskaat eun tammik ar gour-lanchen dizec'het gant poultren an hent, en eur c'houlanteri eur podat bier pe daou, ha perag nije ket ? Kaout a reaz eno ive eun neubeut lakipoted krog d'ober banvez ; ar re-man, pa glevchont petra a oa er zac'h, en em glevaz 'vit c'hoari d'ezan eun dro louarn bennak.

Unan anezo, keid ha ma oa e genseurted o talc'hen kaoz da John, a denaz ar c'had er meaz euz ar zac'h hag a lakeaz en e blas eur pikol targas.

O veza n'em grenveet awallac'h evit echui e hent, hon Saoz a zammaz e zac'h war e skoaz, hag e kuit mar ouie bale. N'eur zigoueout en Londrez, ez eaz da di an Aotrou a oa kemmenet. Heman en em gav ez eon er gegin : « De mad d'eoc'h. Aotrou, eme hon John, sethu va mestr, an Aotrou hema-hen, n'euz kemmenet d'in digas d'eoc'h e prof eur c'had beo.

— Ao Ies ! mad tre ! gwelomp anezan, hag ember a vo fiskoan.

Digeri a reaz neuze ar zac'h, hogen, pebez estlamm, pa welchont eun targas kaër oc'h ober ranv ! ranv ! hag en em lakaat en stad da gemeret e frankiz.

— Tanfoeltr, eme John-Bull, beza e oa koulskoude eur c'had e Hampstead, rag me va unan ema gwelet lakat anezan er zac'h !

— Distroet en dro, diot, a lavaraz an Aotrou, ober goap 'n hini-ma ar reze dioutoc'h !

Hon den a zammaz e dargas war e chouk adarre, hag e-kuit, mall gantan tresek ar ger. Evelato, egiz a zigouez gant kalz Breizaded, daoust d'ar prez oa varnean, ar bodillou a zo touelluz, hag e renkaz mond en dro d'ober eur gwel d'e genseurted euz an hostaliri. Kaout a reaz anezo, holl c'hoaz eno. Heman a gontaz d'ezo petra oa c'hoarvezet, evit didui anê eun tammik. Ar re-man, evit c'hoari an arvest penn-da-benn, a gavaz an tu da



denna ar c'haz er-meaz ha da lakaat ar c'had a-nevez er zac'h heb ne ouezaz netra, hag hor Saoz var-zu ar ger.

En eur zigouecout e oa mall gantan lavaret d'e vestr an neventi-ze :  
— Aotrou ! ha gout a rit ho peuz lakeet ac'hanon da gas eun targaz d'ho mignon elec'h eur c'had.

— Tec'h 'kuit ! arziot, eme an Aotrou.

— Tanfoeltr ! kredet da vihana ho taoulagad !

En eul lavaret an dra-ze e zigoraz e zac'h, ha setu ar c'had o tont er-meaz.

Ar Saoz a leuskaz eun hopaden kement evel oa strafillet.

— Dre Jezuz ! emezan, e Hampstead ez eo eur c'had, hag e Londrez ez eo eun targaz !

— Deut, deut, eme ar mestr, laket anean en dro er zac'h ha distroet gantan.

— Salhokras, Aotrou, ne c'hellan ket ken mond avad ! rag ma c'hell aezen fall Londr digas eur c'had da gas, c'hallfe trei ac'hanon ivez en azen.

IEUNIK AR C'HASTELLNEVEZ.

---

## AN TRI BREUR

---

Eun den en devoa tri mab. Eun tammik ti a oa e holl peadra. A briz ebed ne felle d'ezan e vije gwerzet an ti-ze goude e varo.

Setu ma lavaraz, eun devez, d'e vugale : « An ti ma'deud'in digant va zad. Ne fell d'in tam e ve rannet etrezoc'h. Deskit-la pepini eur vicher ; eit d'en deski e leac'h ma karfoc'h. An hini ahanoc'h a labouro ar gwella en e stad, hennez a vo divezatoc'h perc'hen d'an ti. »

An tri breur a gavaz mad lavar o zad. Ar c'henta a lavaraz e vije houarner kezek, an eil, troc'her-baro hag an trede, mestr-eskrimmer. En em glevet a rejont da erruout er gear a-benn bloaz ha pepini a en em lakeaz en hent da glask deski e vicher.

An eurvad o devoa o zri, da en em gaout gant tud gwiziek. Roet e oa d'ezo kenteliou dispar.

Ar c'henta a vije lakeat da houarna kezek ar Roue : Oh ! a lavare, avechou, outan e-hunan, sur awalc'h an ti vo d'in-me.

Ar barver, ne droc'he baro nemed d'an Aotrone vraz. Aliez ive e sonje e vije perc'hen da di e dad.

Ar mest-eskrimmer evit deski e vicher a bakaz meur a daol flem en e gosteziou. Awechou e vijent ken pouner ma venne sempla. Mez atao e voustre var e boan. « Mar bezan, a lavare, re gizidik da zeski va micher n'em bezo ket ti va zad. »

—o—

Tremenet ar bloaz, an tri mab a zigouezaz er gear. E oant o klask an tu da ziskwez d'o zad pegen aroutet oant var ho micher.

Hag inthi, gwelet eur c'had o redek dre ar parkeier. « Ha e fei, setu aze, eme ar c'hosa, hag a zo deuz va doare. » Ha, d'ar red, kemeret dour, saon hag eun aoten ha da heul ar c'had. Krenna 'reaz d'ezhi he baro en eur c'haloupad ; kempen zoken he moustachou heb troc'ha tam, he diouchod nag he muzellou.

— Allô, mad, mad, avad, eme an tad. Mad tre ouzout da vicher. An ti, mezaon, a vo d'id-te. Dispar ouzout labourat.

—o—

D'an ampoent setu eur wetur o tont. Al loen a ioa diouthi a deue d'an daou-lam ru. « Bremaik va zad, eme an houarner-kezek, e vel-fot penaoz e ran va micher. » Hag e-pad ma oa ar wetur o tremen,



iao ! eun taol turkez var pep houarn koz hag an hern d'an traon, c'hwec'h taol morzol war pep houarn nevez ha staget hern all deuz treid al loen.

— Brao, brao ! avad eme an tad. N'e ket eaz lakat kem etre te ha da vreur. N'oun dare kalz da biou rei an ti.

—o—

Ar glao a en em lakeaz da gweza. « Tad, va zro me brema, eme ar mab all. » Hag hen dihouina e gleze. En em lakat a reaz da drei ha zizrei anezhi azioc'h e benn. Parad glao ebed na gwez varnan.

Neubeut a neubeut an arne a greskaz. An dour a gweze deuz an Nenv, evel ma vijer bet o teuler gant baillou. Mez ar c'hleze a iea hag a deue ker buan en dro da ben ar mestr-eskrimmer, ma na gwezaz beraden glao ebed var e zillad.

— Ah ! fidandouille-douille, eme an tad, te zo ar gwella desket var da vicher. An ti zo d'id.

An daou vreur all, ne gemerchont ket a gasoni evit kement-se. Leun a garantez an eil evit egile e chomjont ho zri er memez ti. Labourat a rejont pephini, var ar vicher en doa desket. N'oant ket bet pell evit dont da veza pinvidik. Beva o doa great koz-koz ha pa deuz unan anezo da vervel an daou-all a vevaz gant ar glac'har. Hag evel m'o doa bevet o zri dindan ar memez toen, oant lakeat er memez bez da ober o c'houisk diveza.

Gwir garantez etre tri zen  
Gant ar maro na c'hell tremen.

DOPH AN TI-ALL.

---

## SKEUDEN AR VUEGEZ

---

*Da Genec'hdu "Huelvar" — Testeni a garante*

Pell dimeuz ti ma zud en bro don ar C'hreiste,  
War eul lestr a vrezel en em welchomp eun de  
Goude eun toullad blaveziou.

Diwar neuze bepred bep beure ha bep noz  
E vijemp hon daouik evel mignoned koz,  
O konta hon zammou troiou...

Dalc'hammad vijemp seder, dalc'hammad vijemp laouen,  
Na anveemp kamed na trubuill, nag anken  
Beva a remp evuruz braz ;  
Hon c'halonou dinec'h ha drant evel evned  
A gane hep paouez ha dudiuz meurbed,  
Ar martolod hag ar môr glaz !

Pa goueze ar zerr-noz e-pad an deiou-hanv  
Pa c'houee en dro d'emp eun ezen flour ha skanv  
E savemp war ar wern uhel ;  
Ha neuze luskellet gant kan ar gwagennou,  
Kollet etre ar môr ha bolz kaer an Nenvou,  
E hunvreemp d'hon Breiz-Izel !

Oh ! ia meur a bennad e tremenemp eno,  
O sonjal gant dudi en de kaer an distro,



Te c'hoaz o konta goustadik  
Hag o laret hon daou dirag ar môr divent  
E oa beo en hon c'hreiz, ken beo ha diagent,  
Karante dener eun "dousik" !

Siwaz ! eur c'hlenved kri a greiz-holl a deuaz  
Ha war eur gwele poan didrue ma stagaz...  
Neuze kenavo levenez !

Ma mignon a ouele hag araok ma c'hwitad :  
— Hep dale, emezan, en em gavi iac'h mad....!  
D'az kwelet ec'h in aliez...

Aliez e teuje, emezan, d'am gwelet...  
Eiz sun a dremenaz hag hen na deuaz ket !  
Pa gouezaz ma c'hlenved neuze ;  
Hag e tizroiz c'hoaz dinerz mad ha kasti,  
Seder, rag em c'halon me a vire ar spi  
Da gad ma mignon adarre.

A boan am oa laket ma zreid war al lestrik  
E c'houlenniz dustu : — Pelec'h eman Yannik,  
Ma mignon koz, ma mignon mad !  
— Yannik, oa d'in laret, a zo tec'het pell 'zo,  
Tec'het ez eo aboue eur seiz sun pe war dro  
Hag hen evuruz o kwitat...

Yannik a oa tec'het...! Ma-hunan e chomen,  
Evidon ar vue a oa goullou ha ien,  
Karget a c'hlac'har, a boaniou !  
En dro d'in an holl dreo a zeblante maro,  
Arri oa miziou du, an amzeriou garo,  
War ma dioujod ruillaz daerou...

Ma daerou a ruille stank ha kri, ha poaniuz  
Hag em spered sonjou a dremene founuz...  
Gwasan dishenvelidigez !  
Seiz pe eiz sun a boan a oa bet tremenet  
Hag hon plijadur gaer en keit-se oa tec'het,  
Nag eo dister ar vuegez !

AR YEODET-BOCHER.

---

## An Alc'houeder

---

Miz maë, miz ar bleuniou ! Setu ar miz seder  
Lec'h glevan da vintin mouez douz an alc'houeder  
O kana da Zoue krouer braz ar Bed-Holl  
Eur zon leun a zudi, duze, war du Sao-Heol  
— « Digorit d'in, mar plij, Salver, dôr an Nenvou. »

Digouezet eo brema, huel, rez d'ar c'houmoullou.  
Pignal a ra, pignal 'ra c'hoaz. He mouezik skler  
Aslavaret gant an ekleo 'glevan tener  
Evel huanaden ziveza eun ene  
O c'hedal 'barz ar glac'har gortoz moned d'an Ne  
'Vit arvesti oc'h Doue ar Vadelez heb par  
He c'hened, he Vrazder en e Balez dispar.

*Moëlan*

Loeiz GOURLET.



## K E N A V O !

WAR DON : *Bonjour, ma petite Jeannette.*

Eru eo ziouaz an termen  
Ah ! evidounpebeuz anken,  
Kuitad Breiz-Izel ma bro  
Vit monet d'an arme ;  
Da serviji an drapo,  
En eur gaer dizanve.

Ma c'herik a renkan kuitad  
Dilezen ma mam a ma zad,  
Ma c'herent, ma mignoned  
Ha kement a garan ;  
Kement a blij d'am spered,  
E tilezin breman.

Ha ma dousik ma c'harante  
A renkan dilezen ive ;  
Mari, Mari ! a garan  
Fleuren an oll verc'hed,  
Pa zonjan en kement-man  
E trubuill ma spered.

Rog ma kuitein euz ma bro,  
Me ei da laret d'ei kenô :  
Me ei beteg a C'hleuniou  
Elec'h me man he zi ;  
Hag eno me gimiado  
Deuz ma " dous " koant Mari.

Me laro d'ei dre ma anken :  
Mari, n'en ankoet biken  
Deuz an noz hag er mintin  
Mari 'n ho pedenno ;  
Pedet hon zalver divin,  
Vit ma tin c'hoaz d'em bro :

» Gravet er vad en ho kalon  
Er zonzj demeuz ho kwir vignon,  
Rag biken na ankouein

Keit ma vin war ar bed,  
Mari, Mari a garan  
O dreist an holl verc'hed.

» Pa vin pellaet euz ma bro  
Ha kollet er zonzj ac'hanon  
Eun all a teuio neuze  
D'ho tenti ma dousik,  
Hag esao hep dale  
Deboch ho kalonik.

Mez Mari pa viet tentet,  
Da drei gant eur sort trubarded,  
Skoet war boull ho kalon  
Pe laret ma hano ;  
Ar zonzj demeuz ho mignon  
Bepred ho konforto.

» Pa mo laret ma zonzj d'ezi,  
Ha klevet mad he zonzj ganthi,  
Neuze me a gimiado  
Euz ma c'hornik douar ;  
Ha noz ha de me zonzjo  
Barz an-hini em c'har.

» Mar me ar c'hras digant Doue  
Da zistrei c'hoaz d'ar Gerneve,  
Lakin eur maill diveza  
Da gloza ma chaden ;  
Eur maill demeuz er c'hrenva  
Ha na doro biken.

*Duot.*

KENEC'H DU

---

## P E D E N A R V R E I Z I Z

*D'an Dimezel Louiza Gouronnek deuz Lannhuon.*

Gwerc'hez Vari mam da Zoue  
Diouz hon Breiz o bezit true !  
Gret ma vezo 'vel gwechall  
O pia !  
Galloudek ha dishual  
Ave Maria !

Gret ma nijo pell diouz he greiz  
An Ankou du, kriz ha direiz  
Ar melkoni hag ivez  
O pia !  
An estranjourien divez  
Ave Maria !

Gret ma vezo he iez nerzuz  
He iez dinam ha difezuz  
Dre-holl atao enoret,  
O pia !  
Gant he bugale karet  
Ave Maria !

Gret erfin ma reno dalc'hmad,  
Ma reno stard ennhi ar *Mad* !  
'N eur gir, gret ma welo c'hoaz  
O Pia !  
Deziou kaëroc'h vit biskoaz  
Ave Maria !

MATHALIZ.



# Ar Falc'herien

I

Va zelennig chenchomp a don (*bis*)  
Lezomp hor guelvan hag hor c'haon.

DISKAN

O iada  
Kanomp gand joa  
Eur ganaouen  
D'ar falc'herien !

II

Ar falc'her paour a sao mintin (*bis*)  
Abred e za gand e ribin.

III

Aliez kerkent diou a teir heur (*bis*)  
E man var sao ar c'heaz falc'her.

IV

E bater neuze a lavar (*bis*)  
Ne vez ket hir, an holl her goar,

V

Mond 'ra en hent drant ha seder (*bis*)  
Rag eur paotr krenv eo ar falc'her.

VI

Gand e vorzol hag e anve (*bis*)  
Me gred en deuz eun tam fouge.

VII

— Vamean zo mad, va falc'h zo lem (*bis*)  
Ne man ket ar c'hal var e drem.

VIII

Assa paotred holl 'momp ama (*bis*)  
Piou vo hirio an diveza.

IX

Abarz komanz ar c'habiten (*bis*)  
A denn e dog ra eur beden.

X

Goude tap krog er mean lemman (*bis*)  
An holl botred 'ra eveltan.

XI

Setu an holl filhier o sini (*bis*)  
Assa potred koulz eo krigi.

XII

Er foennog ne vez mui klevet (*bis*)  
Met trouz ar filc'hier o redet.

XIII

Pa vez an deiz o c'houlaooui (*bis*)  
Ar falc'herien zo a zrevi.

*Kernouez,*

XIV

Eur blijadur eo o gwelet (*bis*)  
Pa vezont var gorf o rochet.

XV

Ho falc'h a ra eun hanter tro (*bis*)  
Ar foen a strikont diouto.

XVI

Ar streou a zao evel kaeou (*bis*)  
Ar botred zo ruz o fennou.

XVII

Rag var ar gliz eo peurvuia (*bis*)  
E klaskont holl e n'em essa.

XVIII

An dour a red teid an elguez (*bis*)  
Mez chom adren biken jamez.

XIX

Hardi potred chachomp ato (*bis*)  
D'ar foennog vraz greomp e varo.

XX

Erru Mari Jeann gand dijuni (*bis*)  
Leaz ar chaodel a zo ganthi.

XXI

Al loaiou beuz a c'hoari mad (*bis*)  
Buan eo rinset ar bodezat.

XXII

Goudeze krogent adarre (*bis*)  
Mont a reont iud e teid o stre.

XXIII

Evelse tremen an dervez (*bis*)  
E kreiz al labour hag ar prez.

XXIV

Gourvez a ra ar c'heaz falc'her (*bis*)  
E gorf brevet gand ar skuisder.

XXV

Ankounnac'hat a ra e boan (*bis*)  
O tribi kig ha farz d'e goan.

XXVI

Eurus an den o labourat (*bis*)  
P'en deuz feiz ha bolontez vad.

XXVII

Da Zoue e kinig e boaniou (*bis*)  
E c'houezen hag e labourou.

XXVIII

Er baradoz e tiskuizo (*bis*)  
Eur gurunen en deuz eno.

Louis AR PAGE.





## MONT DA BARIZ

---

1

En hon Bro zo tud iaouank  
Hag a ia da Bariz.  
N'eur zonzal gonid arc'hant  
Muioc'h vit en Breiz.

2

Ha pa vent arru eno  
'Na c'honzont netra  
Kalz a boan a c'houzanvont  
Vit kad an tamm bara.

3

C'hoaz o de kalz a vizer  
'Micheriu 'r poaniusa  
Bemde renkont da ober  
Evit gallout beva.

4

Desket gant ho c'henvreudeur  
Da evan « dour c'houero »  
Prestik arru ar gwalheur  
Hag an holl klevejo.

5

Neuze e zonzont er ger  
En ho mam, en ho zad

A zo 'kreiz ar parkeier  
Duhont o labourat.

6

Mar vejent chomet ganthé  
Vejent bet evuruz  
Bevet avad o dije  
Vel tud fur ha nerzus.

7

Ha breman renkont mervel  
Pell, pell dimeuz ho Bro.  
Pell deuz ho Bro Breiz-Izel  
Enkreiz an holl boaniou

8

Chomet hep mont da Bariz  
Chomet en hon Bro Breiz  
Ma virfet, ma c'henvroiz,  
Ho iec'hed, hag ho feiz.

Penn DERO

*bet en skol vrezonek skolaj  
Gwengamp.*

---

## D'AR MENEZ BRE

---

*D'ar barz Ab-Alor.*

O menez kran ha sioul ! O menez dudiuz !  
Bez alaouret Gwenc'hlan ! Tron uhel Sant Herve  
Nag ez oc'h koant ha kaer !... En ho gwerziou nevc  
Oll barzed an Arvor ho meul ato, joauz !...

Menez Bre, o menez barzonuz an Tregor  
Davedoc'h pa dolan eur zell, eur zell hepken  
Pell euz va c'hreiz e nij buanik an Anken  
Ha d'an Awen raktal va ine a zigor !

C'houi zo, o Menez zakr, Parnass ar Vretoned  
Kermarker ha Luzel, Yann Ar Gwen ha Rannou  
A dorraz ho zec'hed da zour ho mammennou.

Ha setu vit perag, marteze, deuz kanet  
Ken tener ha ken c'houek, ken dispar ha ken reiz  
Epad ho holl bue, douar enoruz Breiz !..

MATHALIZ.



## *Kentoc'h mervel !*

*D'an mignon Loeiz Ar Menn (Pagan)*

O kanomp ar Frankiz, Bretoned ter ha goue ;  
Ato vit he diwall, ato bezomp war zao !...  
Keit ha ma vo ganimp eur c'houezaden bue  
Stourmomp holl eviti, kalonek, hep arzao !

Nag eo spontuz ha kriz allaz ! beza gwasket !  
Hirvoudi glac'haruz er eur skuilla daero  
Ha gouzany ouz lagad an trec'her miliget !...  
Gwell e vije mil gwech, tan-dir ! beza maro !...

C'hanta, setu deuz c'hoant ar Fransijen hudur  
D'hon flega dizale zindan ho ieo heuzuz !...  
Ha lezel refomp nê, broiz krenv ha nerzuz ?

Ober d'ho faltazi hervez ho flijadur ?...  
Nan nan, kentoc'h mervel 'n eur enebi onte  
Eget beza sklaved en hon Bro goant, eun de !...

MATHALIZ

---

---

## *Dihunomp !*

*Da Loeiz Herrieu.*

Dihunomp o Kelted Breiz-Vihan ha Tramor,  
Setu an amzeriou diouganet gand Marzin  
O tonet !... Dihunomp ! hag en despet d'ar mor  
Unanomp hon daouarn ha kanomp holl lirzin !

Kanomp ar c'han dispar a gane hon tadou  
Arog mont d'ar brezel ! ha diskwelomp timad  
D'ar Zaozon ha d'ar Gall, ha d'an holl broadou  
Ez omp eur ouen atao ! eur ouen hag a dalc'h mad.

Diskwelomp d'e hon deuz, hirie evel gwechall  
C'hoant da veza difank, difank ha dishual  
'N hon c'hoajou gwez ha du, n' hon lannou torgennek !

Dihunomp 'ta ! Deud eo an heur potred pennek,  
Dihunomp ha war zao ! war zao evit hon Bro !!!  
Enez Aval (1) a drid e-kreiz ar mor garo !...

MATHALIZ.

---

(1) En Aval : En pehinl eo beziet ar roue Arzur.

---



## AR GLANDED

---

'Vel ar bugel seder, na me garje kavout  
Eun ine ha n'anve nemet peuc'h ha glanded,  
Eur spered ha biken en drouk na n'euz sonjet,  
Eur galon reiz hag eün ha na oar 'met karout!

Perag e lezomp-ni ken buan a goste  
Glanded kaër ha skedus hon c'halon a vugel?  
Perag 'tiskrogomp-ni d'ar c'hentan bar-avel  
Euz ar berlezen goant a luc'h en hon ine?

Ah! ar c'hlizen veure, pegen kaer hi gwelet  
War eur prad dru ha glaz treuzet gant eur wazik,  
Pa zav ru en dremwel an heol c'hoaz izelik,  
Ha pa ve tro war dro kaniri da glevet!

Ia! mez siwaz! Buan an heol a zo poac'huz  
Ha lec'h an êzen fresk a rê d'hon c'halonou  
Eur vad meurbed dispar, na n'euz ken er prajou  
Evit hon zistanan 'med eun êzen dêvuz.

Glanded ar c'halonou na zispak he sklerder,  
Na skuill he freskadur nemed er vugale;  
'Kreiz ar zioulder hepken, 'vel ar c'hlizen veure,  
E ve kavet o kuz he c'haerder, he douster.

ROC'HLANN,  
*Euz Kalanher (Kerne.)*

---

## Sôn d'am Dousik

---

Ho kalonik, va mestrez,  
'Zo 'vel eul liorz doun,  
Leun a vleuniou, a frouez  
Evit terri va naoun...

An alc'houe a oa bet kollet  
Serret a oa bet an nor;  
Mez, me am beuz e gavet  
Rak-se 'mo an digor...

Ar bleuniou 'meuz kutuillet?  
Douaret 'meuz ganto  
Va iaouankiz tremenet  
Tremenet 'vit ato!

Breman me a gemero  
Ar frouez evit beva...  
Kredi 'ran int a bado  
Tra ma vin er bed-ma...

POTR AR C'HAP.





# Efflam Kerzenan ha Mac'haridik

(DANEVELL NEVEZ)

*Gant Efflam An HENORET (Plestin-an-Traez).*

**Kendalc'h (II)**

---

## XII

Efflam Kerzenan a ziskwellaz gwella ma c'hallaz d'e donton Guillaume Rubeuz, pegen trist a vez doare an dud a zeme, hep n'em garout.... kozeal a reaz goude deuz Mac'haridik, deuz he vertuio, deuz he c'harante evit he zad.... Zantoud a ran eun dra bennag o kas ahanon trezek hounez, goud a ran erfad penoz na vin ket evuruz hep Mac'haridik.

Guillaume Rubeuz o klevet kement-se a zavaz divar e gador evel eun tenn, redek a reaz d'ar penn all d'e gamb, chom a reaz zonn en ezav, evel vit ober goab deuz Efflam Kerzenan.

Efflam, pleget e benn a chomme hep laret man.

Tostad a reaz neuze e donton d'ean, en eur laret : « An dud iaouank a zo evellen holl, ma zonz dec'h a veofed gant aër an amzer.... Dont betek aman da laret ar sort kojou ze d'in me !!! Eur Vac'haridik evel hounez e kaer dre holl!... ia ar sort ze e kavi dre holl!... Na brizfen ket laret kement-se da zen, mar bijen en da blas.... hag anveout a rez te mad awallac'h an daou estranjour-ze deuz pere a lerez kement a vad ? An dud-ze a zeu deuz ar broiou all a oar konta gevier, na ket da gredi man !! Anveout a rez awallac'h Mac'haridik evit mont evel eun den dall da staga da galon ouz he hini dre ar briedelez !... abalamour da betra a deuz kwitaed ho bro?... Pelec'h a man mam Mac'haridik?... Ar pez a zo koz d'ê da vea deut dre aman.... ar sort tud ze a vez da c'hout petra vent !!...

— N'et ket da laret kojou evelse diwar benn tud maluruz ! na zisc'hret ket reputasion tud, hag o deuz bet kement da zouffr, evit difen ho fe, evit difen ar wirione... an hini a ra troiou evelse...

— Fe, a laraz Guillaume, n'eo ket evit .... na drouk komz deuz int, na deuz ho bro, eo a laran kement-se... mez eno evel er leac'h all a vez a bep sort !... Gallout a reont bea deut dre aman... abalamour da dreo... ha koulskoude nan... na gredan ket a vefe ar reman evelse memez tra.... Pa welan Mac'haridik hag he zad var bennou ho daoulin, a renkan lezel a gostez ar zonzou-ze.... kompren a ran, penoz iaouank, dibenn evel ma c'hout, a c'hout deut da garout hounez, mez red eo d'id kas pell deuz da spered, ar zonzou-ze ! Entre an demezel Fernande Keriell hag hounez a zo kalz a ziferanz ! Goud a ran, penoz ar gomerezed dre aze, ho deuz kontet, kalz a gojou diwar he fenn... koulz ha diwar benn he zud... eun den a skiant na gle kamm et selaou tud evelse.... Laret ha deuz penoz an Itron Kerel a devoa peed unan bennag evit aesa lakat an tan er loch a zo en kichen ar Gaër-Veur..... kojou barbillaerezed.... Mont da laret ar sort traou-ze diwar benn eur famill, ha na neuz netra da damall d'eï.... Piou a c'halfe diskwell eo gwir komerajo ar barbillaerezed-ze !

Lezel a gostez Fernand Keriell evit kemmer unan ha na deuz netra ! Penoz eun den a skiant vad evel dout-te a c'hefe evel eun den zod, da neur deuleur er baourentez, er vizer ! Dre aman evit beva eo red kaout boed hag arc'hant, ha pa po kavet eur vro, er lec'h ma vez ar boed evit netra neuze a roin d'id ma c'honsantamant !... neuze a c'halli demeï da Vac'haridik !

Penoz a rin-me breman, da vont da di an Aotrou Keriell?... ha pa glefont kement man !.... an Dimezel., an Itron pere oa ken mad evidon.... Petra na deuz int ket graet... evit lakat ac'hanout da vont d'ho zi ?!.... Laret a vije na teuz ken tam skiant ebet en da greiz !

Ker buan ze a teuz ankouet ar vad graet evidout ? An arc'hant pres-



tet, er c'heit ma c'hout bet en Pariz..... ar pemzek milliour-ze a roâz da fam evit pemp dre gant ! ha breman lezel a goztez... e verc'h ! Kerkent a ma klevo an Aotrou Keriell kement-se a renkfet zevel an arc'hant-se, a dra zur..... Petra a chommo ganit d'ober neuze?... gwerza maner Kerzenan ha rei anean evit netra !

Lavar d'in da vihana, pe sort loden a peuz zonz da werza ! Daoust p'ahen a vefe ar prajeier ! ar parko ! Paour kaez tadou koz, deuz fonz ho pe. pardonet d'ho mab, dare da droka an douarou-ze, ho peuc'h gweach all glebiet, evit eun hunvre !... ar jardino, er lec'h ma c'hez ken aliez da vale ! ar fleur ze pere a blantaz da dad paour kent mervel..... ha neuze, pa po gwerzet, prajeier ha parkeier, petra plijadur apo ? Na vi ken evit foura da benn er meaz deuz da brenest, hep gwelet ouz troad ar maner, unan bennag, eun estranjour, o labourat douar da dud koz..... hano an Itron Kerzenan na vo komzet dioutan, nemet dre vempriz ! Lakat a ri da vam ken maluruz ha te !..... Setu dirag ma daoulagad eta, an hini a gle bea ma hiritour ?..... Setu aze ar pezh a moa da laret d'id... gra breman evel ma kari..... mez dalc'h sonj-mad, ma teuez da vea maluruz goude kement-ma.. bez sonj mad penoz entre Guillaum Rubeuz ha te, a vo bepred, evel eur punz !

Epad ma kozee e donton evelse, Efflam Kerzenan, a zellaoue anean hep ober kalz a van, koulskoude, dont a reaz an nec'hamant en e galon, epad an noz pa deuz da zonz d'ean deuz ar pezh a nevoa klevet..... « Me garje, a lare neuze, a vije pell diouin, kastell an Aotrou Keriell, ha pelloc'h c'hoaz ma zonton. »

— Abalamour da betra n'em glemm ? Tud pinvidikoc'h evidon a deuz goulennet Mac'haridik da zemei !!!..... ha Mac'haridik a deuz bepredlaret nan !!!..... ha koulskoude petra a zo koz d'eï da laret eo Tremel ar vro a gar ar muia varlerc'h he bro ? hag abalamour da betra ? Piou oar !!!... Ma karje hepken ober eur c'hoarzaden diouin : Aotrou Doue digaset ho peuc'h ho zervijer var an hent-se !... Goud a ran, penoz ma c'halon n'eo ket dinam awallac'h evit sonjal er sort traou-ze, ma c'houlennan diganec'h kement-man, eo abalamour da mam, hag evit ma c'hoarveo ar pezh a laraz ma zad en eur vervel... Me a garo Mac'haridik, rak goud a ran na deuz bet nemet displijadur betek aman ..... Pegen joaiuz a vezo neuze, maner Kerzenan ! ha dreist holl ma c'halon me.... varc'hoaz a c'hin da welet an Aotrou Lafond, ha goude d'ar Gear-Veur.

Mez ma buez tremenet... ma iaouankiz, en kostez Pariz.. Doue a neuz ma fardonet... mez an dud !... nan gwelet a ran ervad, penoz Mac'haridik na nem unano biken gant unan eveldon-me ! Kenavo eta ma holl esperanz !... C'han da goll evit biken an hini a glee ma c'honsoli... Diwar hirrie, diwar vremen tam evurusted ebet ken... Et eta pell diouz ma spered, sonjou ma iaouankiz, hag evit biken... Abalamour da betra an Aotrou Doue a nefe roet d'in ar sklerijen da zont var an hent mad ? da garout anean.., an evurusted eta na nem diskwell d'an dud nemed evit ho lakat da zouffr muioc'h mui. C'houi ive tud iaouank, pere a zeuio var ma lerc'h, a neur gavo evidoc'h eun de, goude bea tremenet ho pue en dizurz, a welo dirag ho taoulagad, eur plac'h iaouank fur bennag, evel Mac'haridik hep memez, teuleur eur zell varnoc'h, a gweo eveldon en dristigez !

Ar zonzou-ze na gwitaent kamed mab an Itron Kerzenan.

### XIII

Petra a zo a nevez en Tremel ! ma klever mouez skiltruz ar c'hleier, petra a zo a nevez vit ar beure ma weler ar merc'hed, an dud iaouank, o redek treoek ar bourk ; en koste an hent braz, unan kez bennag, daou-bleget hepken, a chom warlerc'h. Setu eur c'haroz braz o c'hariout er bourk ; eur wetur a beder rod, daou loen kezek ru tan, gant o c'hakipajou arc'hantel.

Mari-Louiz melin Sant-Nikolaz a deuz laket he dillad brava.

En maner Kerzenan, a weler Soazik, prez braz varnhi, kazi prest da goll he skiant.

En toull dor Iliz Tremel, Yvona ar baourez, laket ganthi he dillad d'ar zul, eur c'hoef fresk, a lavar he chapeled.

Petra a zo eta a nevez ? Laret d'in abalamour da betra a teuet er maez, war dreujou ho torojou, evit zellat tresek traon ar bourk, abalamour da



betra a weler ho pugale, gant dreizennou hir, var an hent, hag en toull dor ar vered.

Tresek ar c'hreiz-de, en hent a zeu d'ar bourk, a weler eur potr iaouank gwisket kaër, o vale e-hunan, gant eun Itron var an oad.

Er c'harant a zeu deuz Sant-Nikolaz en eur heuil ar rivier, a weler ive, tud gwisket kaër, er penn arok, eur plac'h iaouank, krog en brec'h he zad, en kerc'hen ar plac'h iaouank, gwisket en gwen a weler eur vedalen arc'hant.

Arruout a ra an den iaouank, e vam hag ar plac'h iaouank, gwisket en gwen, a meump gwelet bremaik, er bourk; neuze an dud a zired er meaz; ar botred vihan a meump gwelet o troc'ha drez, na deuz ket kollet ho amzer, ha breman deuz adalek eur penn d'ar bourk, an drez a c'harze an dud da dremen.... an daou den iaouank a gase ho dorn d'ho godel, ha kerkent, jaoiuz ha kontant, ar vugale a dole a gostez ho drez.

Heuillet gant eun ugent den bennag, Mac'haridik hag Efflam Kerzenan, a c'ha bremaik da veza eureujet.

Setu aze daou den iaouank chik a lare an dud, dre ma tremene an daou iaouank. Sellet eta deuz Mac'haridik, laret a vefe eun aël.

Tostat a reont da doull ar verred, c'heont da vea unanet, evit biken, dirag ho zad, ho mam, pere marteze na vont ken abarz eur bloaz pe daou aman.

Ar c'hloc'h a zon... An Aotrou Person en e zorn galloud an Aotrou Doue a deuaz er c'heur, an dour en e zaoulagad hag a c'houlennaz digant an den iaouank: « Efflam Kerzenan, aman dirag hon mam santel an Iliz a gemmer evit ho pried Mac'haridik Remon. » Efflam a zantaz e galon o tridal gant ar joa, nan biskoaz na nevoa laret ia, gant kement a gontantamant. An Aotrou Lafond, a reaz ar memez goulenn digant Mac'haridik... ha kerkent an oferen a gommansaz.

Goude an aviel, an Aotrou Lafond a zizroaz, evit laret d'an daou bried iaouank eur gir bennag:

Ma bugale, emean,

« Hep Doue, an holl vadou, an holl blijadurezou, na n'int netra! Pa ne » vez ket Doue er galon, ar galon ze a vez kollet; hag en eur galon bur » ar zonzou, an dezirioù holl a vez pur.

« Bea a zo eur gir, eur gir hag a glever dre holl, koulz en ti ar paour, » evel en ti ar pinvidik, koulz en ti an disterra deuz an dud, evel en pa- » lez ar rouane, eur gir a gle an den da laret pa zav e galon tresek Doue, » koulz ha tresek an dud (me a gar). Ar garante a zo eun dra deuz ar » c'haëra, nag en Nenvo, na var an douar na neuz netra kaëroc'h.

« An dud a vuez fall, o nem strinka en mesk ar blijadurezo difennet, a » lavar ar gir-ze. Sant Visent a Bol, er lare aliez an daëro en e zaoulagad, » en eur boket da dreid hon Salver, d'e groaz santel....

« An den fall a nem servij deuz ar gir-ze a vez kaset n'oun ket da bel- » lec'h... Sant Visant a Bol, a ziskwell d'eomp penoz ma c'heo ar gir-ze » eur gir a zizurz, en ginou darn deuz an dud, a c'heo en ginou eur c'hris- » ten, eun den vel zo gleet, eur gir a gonsolasion.

« Ar garante direglet, a zo penn-koz d'an traou abominabl a velomp dre » holl en devez a hirie.

« Ar garante bur, a zo en kalon an den, henvel ouz eur boket roz gwen, » digas a ra d'ar galon ar c'houez vad, grasou an Aotrou Doue, an urz » vad, ha gant an urz vad ar peuc'h.

« Doue eo skeuden ar gwir garante, tostaat eta d'ean bepred; an tiegez » e lec'h ma ren ar wir garante a zo aezet da anaveout, eno e man ar » peuc'h, ar vugale a zent ouz ho zud.

(Da heuil.)

---

Moullerez dre dan AR GWAZIOU HA JAFFRENOU e Keraez (Penn ar Bed)

---

Le Gérant : F. JAFFRENOU.

